

eur plac'hik iaouank a garan meurbet a zo deread  
 c'houi voar vad eur plac'hik a humeur vad  
 keus e ve ganen ma ne hallen gouzout an adress ag ar fesson  
 Da plijout d'he opinion.

C'hoas e meus c'hoant avanturi  
 mond d'he zi de saludi  
 Da c'honta dezi va hirvoud  
 mar plich gati va fermetout  
 Da konta dei darn deus va santimant  
 Gouzout he hini a meus c'hoant

Bonjour va dous flourdroulisen  
 fumelen charmant dre ar bed  
 me a gred.

Bras eo an douster hag ar c'hras  
 a zo skrivet var o bizach.

tollit evez den iaouank  
 na kemener lachete  
 Goude ober kement a fessoniou  
 Deufec'h da ober goab ahanon  
 Deufec'h da chench a santimant  
 Goude mem be nehamant

Mar o c'heus aon rag kement-se  
 setu aman tri c'hant skoët  
 Me a gret.

eur voalen aour en assurans  
 na kemerit ked a zifichans.

O trugarez den iaouank  
 ne meus ked affer o harhant  
 ho koalen aour a kemerin  
 en assurans petek dimezi  
 eur pok pe zaou a houlenan  
 ia mar plich ganeoc'h rei din breman.

en deo ket madou na genet  
a ra din dond do koelet  
me a gred.

Karantez a fidelite  
Zo bed en tre zomp on daou assamble  
Gand henor a plijadur  
Deuan do koelet a dra sur.

hag e ve ar vro man e baper  
hag an oll rivierou  
a liou,  
eus an en plun an oll lapousset  
hag e vent-hi holl dastumet  
nen deo ket kapab da skriva  
eur garante evel oman.

Janneton Puil, 9 juin 1851.

*Il n'y a pas de titre.*